



Karned an enklasker

Sikourit an enseller da gavout an torfeder !



Un enklask war ar stern

war ar stern

Un enklask

Kartenn an hentad

Stank ar vilin nevez



- 1: LEC'H AN TORFEOKER
- 2: DISKRED 20 WAR DARN
- 3: UR C'HORFSKETADUR DIGUSTUM
- 4: KLASKOMP LIAMMOÙ ETRE AR MERKOÙ
- 5: WAR ROUDOÙ AN TORFEODER
- 6: DEOC'H DA VARN !



Padout a ray an enklask :
War-dro 1 eur
Un droiad 2km

Lakaat botoù bale



Degemer mat deoc'h enklaskerezed hag enklaskerien, e Mirva natur rannvroel lanneier, prajeier ha stankoù Plounerin



Galvet eo bet an enseller Fri Furch da zont da Stank ar Vilin Nevez e Plounerin evit diskoulmañ un afer gevrinus.

Un askorn zo, gant se zo bet un torfed drol amañ... Gant « Karned an enklasker » ec'h it da sikour Fri Furch da ziskoulmañ an afer-mañ. Digorit frank ho taoulagad, astennit ho tiskouarn ha deomp war roudoù an torfeder.



Gallout a rit amprestii
ur sac'h-kein ostilhoù
ha levrigoù a-leizh ennañ
digant ti an douristed, deoc'h d'ober
gwelloc'h anaoudegezh gant ar vuhez er
stank. Ennañ e kavjet ur c'hevellunedem,
sturlevrioù naturelour ha traoù d'ober
koulz evit are vras hag ar re vihan...
Evit gouzout hiroc'h, gwelet gant ti an
douristed : 02-96-05-60-70

*Evit kregiñ gant an
enklask, troit ar bajenn.*



1

Lec'h an torfed



N'hon eus ket kalz a verkoù, war-bouez an dra-mañ... a zo heñvel ouzh un askorn !

Petra a rafec'h evit delc'hen gant an enklask ha kavout piv eo an torfeder ? Lakait ur groaz dirak ar pezh a zlefe un enseller a-feson ober, d'ho soñj :



Gelven a ran ur mignon



Sevel a ran ur skritell da c'houlenn gant an torfeder en em rentañ



Ober a ran ur selfi da skignañ war ar rouedadoù sokial



ARNODVA SKIANTOÙ

Kas a ran an askorn d'al labourva

Diskred zo war darn



Ur soñj mat e oa kas an askorn d'al labourva ! Hervez an dielfennadurioù ec'h eo ul lodenn eus skeledenn ur pesk. Diwar se e c'hallomp lemel un anv diwar roll ar re hon eus gwelet en-dro d'ar stank a zo diskred warne. Tresit ur groaz war an hini a zo didamallet.

Neuial a ran dindan an dour evit mont war-lerc'h ma freizhoù. A-wechoù e rankan chom ur vunutenn war apne evit tapout ur pesk.



Ma welit ac'hanon e seblantin deoc'h bezañ ur fuzeenn glas-metal. Prez a vez warnon rak evit plijout da'm farez e profan ur bern pesked dezhi.



Amañ e vezan o pesketa el lodenn eus an takad a zo en hanternoz. N'on ket deuet mat e lec'h all.

Kreskiñ a ra ma dent hep paouez, evel ma reont da dour ar c'hrignerien, gant se e vezan e-pad an deiz o krignat geot war vord ar stank.



Chaseal a ran ar pezh a vez kavet ar stankañ, diouzh ar mareoù eus ar bloaz. Ma welit degadoù a douseged toullgofet e fin ar goañv ec'h eo me a zo kaoz, sur a-walc'h. War ar stank e tebran pesked dreist-holl, koulz re vras ha re vihan.



- Diwar ar skeledemoù hag an askorn, klaskit piv zo bet lazhet. Merkit e/hec'h anv amañ :

Ec'h eomp da c'houlennata unan eus ar re a zo diskred warne, marteze e roio sikour dimp !



Peseurt pesked a gaver er stank ?

Ma... karped, tañched, mandoged, bekeded... n'eus ket pesked-gwazh evel dluzhed, sur.

Ha gouzout a rit...

Eeee... ne oaran ket... E mod ebet.

Da biv eo an askorn-mañ ?



HUUUM !

Gwell eo ganin lavaret deoc'h diouzhtu, diskred zo warnoc'h...

Fidamdoue !

N'omp ket kustum, ni ar besketaerien, da zebriñ pesked kriz evel-se, war vord an dour... n'hall bezañ nemet ul loen !

Hem, ar wirionez zo gantañ... Neuze e c'hallan lemel anezhañ diwar roll ar re a zo diskred warne.

PETRA !!!






Klaskomp liammoù etre ar merkoù



Greomp ur bilañs diwar liammañ ar merkoù ouzh ar re a zo diskred warne.

Bet em boa titouroù pouezus-bras digant ar polis skiantel diwar-benn unan hag a zo diskred warnañ pe warni. Siwazh, dianket eo ar bajenn-se eus ma c'harned. Gouest oc'h da sikour ac'hanon da adkavout anezhi ? Sur on eo kouezhet en hon c'hichen.

Sellit mat en-dro-deoc'h.



5

War roudoù an torfeder



Roudoù pazioù ha kagalenoù al loen zo bet adkavet amañ ! Gant sikour diaz roadennoù ar polis evit al louc'hoù, e c'hallfet kavout anv an torfeder hep tamm douetañs ebet.



Labour vat ! Bremañ e oaromp piv eo an torfeder :

Evit bezañ sur eus ho respont, kavit gerioù brezhonek hag a dalvez kement hag ar gerioù gallek-mañ (taolit evezh ! skrivit a-du gant ar bistroù)

1 Étang

2 Moulin

3 Prairie

4 Oiseau

5 Pâturage

6 Grenouille

Diskoulm : 1-Stank 2-Milin 3-Pradenn 4-Peuvren 5-Lapous 6-Ran



N'hon eus ken nemet goulennata an torfeder... Evit en ober e vo ret deoc'h cheñch tu d'ar c'harned evit fin an enklask.



Sed aman ur mod da chousour ha fremenet
zo ur c'hi-dour dre al lech-mañ-lech.




Avezet e vez ar
gagalenn-man diwar;
He ment (un follad sañmetrañ)
He neuz (nebut a fank, kalz eskern bhan,
skantennou, blev...)
Ha dreist-holl
ar "c'hwezhdous"!
Hervez kud zo e vege
c'hwez ar mel ganti...

Avezet mat eo chas-dour Eurazia e takad Plounerin. Aman e kavont peadra da zebriñ a-lezh ha kalz a lec'hioù naturel da vont e goudor... Evel-se o doa gallet ur varmm ha daou vihan bezañ en o aez aman da vat. Gwech ha gwech all e c'halled sellet oute e-kerzh an devezh (videoioù ha potrejoù aman : **vu.fr/PlouEng6**)
Siwazh e oant bet friket e fin 2006 war an hent a zo e-kichen an takad-mañ...

Betek-henn zo bet kempennet meur a dra da aesaat o buhez hag evit o surentez :

Ur riboul evit chas-dour: Deshe da
dremer dindan an hent doubl.



Un toull: ur Goudor war ribl
ar wash-dour, dar chas-dour
da gavont trawalc'h a lec'hioù
da vont da lojañ.



Gwarezet eo ar chas-dour rak digresket kalz e oa o niver e-kerzh an
XXvet kantved abalamour ma oa priziet o feur. Ha pa
vefe kresket o niver adarre en deiz a hirte e Breizh, emaint en arvar
depred abalamour ma vez dihelet al lec'hioù m'emañt o vevañ, ma
kavont o bevañs (saotradurioù, takadoù glec'h ha gwazhioù distrujet).

● Gant ar c'horn-selaou e
fall evit ar chas-dour aman.
Gant al lunedenn-hirvel e
c'hallit gwelet an endro ma
vev ar chas-dour.

Ar sklotur
hed-ha-hed an hent:
kuit al ar chas-dour
da vezañ friket
gant ar gwekfurioù.



Un c'hi-dour yaouank

Deoc'h da varn !




Gourc'hemennoù deoc'h ! A-drugarez deoc'h eo bet diskoulmet an afer ganimp !

Dalc'hit gant ar wengenn, diskouezet e vo hent an distro deoc'h gant brou pelloc'h.

Hag ouzhpenn-se ech eo ur pezh labour din mont da chasaal ! En tu all da 5 eur bemdez, abred diouz ar beure pe da serr-noz.

sikour a ran kempouzañ ar pobladou loened.

Tapout a ran pesked gentañ-penn, bresk pe klanv da





Ha forzh ! penaos !

Re wir eo vez graet ar pezh a faot evidon amañ, roet eo bet al label « Lech a beoc'h evit ar chas-dour » d'an takad-mañ. Brav on amañ.

Komzit din diwar ho penn. Hervez kont e teu tud zo a-benn da sellt ouzhoc'h e Stank ar Villin. Nevez...

Who pez un tamm chas e c'hallfet spumantñ achanon e fin an devezh, marteze. Arfin... ni, al loened gouez, zo skoemp. Anat deoc'h n'eo ket forzh piv a vefe gouest da welet ach'anomp !



Evit ma bugale e oa, enseller ! Ret eo din magañ ma daou vhan !

Neuze aotrou ki-dour, gallout a rit kontañ dimp perak ho peus debret ar pesk-se ?




Ach'cha !!!
N'it ket e fulon, e gwirionez ne oa an enklask-mañ nemet un digarez evit ober anoudegezh ganeoc'h.

AAAAAH !
HIHIHI



Mirva natur rannvroel "Lanneier, prajeier ha stankoù Plounerin"

Evit gouzout hiroc'h :
reserve-naturelle-regionale-plounerin.n2000.fr

Gwelet hon c'heleier :
 [vu.fr/FBPlounerin](https://www.facebook.com/vu.fr/FBPlounerin)

Kempennet al levrig hag an hentad gant :



Gant sikour :



UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne



Avec le Fonds européen agricole pour le développement rural :
l'Europe investit dans les zones rurales

